

KIS-832 – Al leterc’hañ e lavar ar skiantoù

(GE ha GC – 12-19 11 04)

[GE – 12 11 04] Pa droer un destenn skiantel e brezhoneg e tleer da gentañ studiañ ar c’heñver etre an ergorennoù hag an termenoù allyezha, da c’houde, ren an hevelep studi e brezhoneg : eno emañ deroù al labour krouiñ, anezhañ savelañ an danvez keñverioù etre an ergorennoù skiantel ha loazioù ar brezhoneg. Arvarus bepred tremen eus ur yezh d’unan all dre hanterezh ar geriadurioù hep teurel pled ouzh al leterc’hadoù a dalvezas da savelañ un darn vat eus an termennoù skiantel er yezh kein.

N’eo ket difennet amprestañ ul leterc’had, a dra sur, met kentañ tra eo teurel pled ez eus ul leterc’had ha digej an treug a zo bet d’an diwanadur anezhañ ; forzh penaos, fazi yezhouriezh eo divizout amprestañ ul leterc’had allyezha a-raok ergerzhout gallusteroù ar brezhoneg ; an hent reizh eo klask da gentañ penn an holl dreugoù leterc’hañ gallus, neuze o c’heñveriañ kenetrezo ha dibab an hini bastusañ (hemañ o vezañ kenkoulz all treug al leterc’had allyezha). Dre an hentenn-se e tremener alies un devezh leun war un termen. Amzer gollet n’eo ket.

Kemeromp da skouer ar c’herienn a Hinouriezh : Gl. *ensemencement de nuages*. Lakaomp e tremener gant an hent a c’heriadur da c’heriadur hag e troer : Br. *hadañ koumoul* ; ar c’herienn-mañ a gouezho en dierouez e-barzh ar steudad : *hadañ gwinizh*, h.a., eleze pell bras diouzh ar ster ambredet ! Ur c’herienn all zo da gavout, pe dre glask ul leterc’had all (ha dibab ur verb all), pe dre zerc’hel al leterc’had met en ur reiñ ur framm all da glokaennoù ar verb *hadañ*.

[GE – 19 11 04] Ar yezhouriezh n’eo ket ur boellouriezh, un arz eo. Ar yezhour n’en deus ket da guzhat an treug en deus kantredet evit degouezhout gant an termen a ginnig, na tevel war abegoù e zibaboù — p’o anavez, rak pell e vez alies a c’houzout pep tra eus an abegoù-se. Un arzur ned eo ket evit peurzisplegañ na kanteizhañ an dibab en deus graet eus al liv-mañ liv pe eus

ar ger-mañ ger kentoc'h eget eus re all. D'ar c'hevredig da ersaviñ. Ar yezherion a zegemer un termen nevez dre abegoù o tennañ d'ar poell moarvat, met ivez hag alies dre abegoù n'int ket emouez outo (ken anemouez int hag ar yezhour e unan war ar poent-se). Ar yezhour n'eo ket un diktatour : kinnig a ra hag ar yezher a zegemer pe a zistaol — ar mestr eo ar yezher, evel nep arval. An droienn *hadañ koulmoul* a ve kavet digevazas d'ar sell kentañ, ken andegemeradus eo ha ma ve an droienn c'hallek *semer des nuages*. Poellata dre leteñveliezh : *hadañ daou zevezh arat*, h.a. ne gemm netra en ersavioù ar c'hevredig, rak pa glever ur bomm, ned eer ket dezhañ dre ar poellata : gortoz a reer digantañ e lavarfe war eeun pezh en deus da lavarout. Ur wech m'en devez ar c'hevredig komprenet un dra, kaer e vez d'an aozer dont goude da zisplegañ pezh a zo da gompren, ne vez ket selaouet. Disheñvel eo degouezh un nevezc'her : ar c'hevredig n'en kompreno ket marteze diouzhtu, met bennozh d'an despizadur roet, d'an arver e-barzh frazennoù e teuy e ster a-wel ; e chañsoù en devo, met n'eo ket an holl chañsoù, rak ar c'hevredig, evel kalon PASCAL, en deus kemeziou dianav d'ar poell.

[GE – 25 11 04] Gant da erbar sevel ur Geriadur an Hinouriezh e teu war wel un arvez eus hon labour n'hon eus ket prederiet a-walc'h warnañ. Unan eus kefridioù an oberoù a embannomp eo reiñ boued buhez d'ur c'hevredig beziat, soñjal a ran en testennoù lennegel pe el levrioù evel ar *Pleustrad* hoc'h eus troet AAB ha te pe, c'hoazh, daoust pegen rouez ve al lennerion, er pennadoù Prederouriezh ; ur gefridi all eus hon embannadurioù, ha n'eo ket an hini disterañ, eo pourveziñ dafar da genderc'herion hon boued buhez : e se, ar geriadurioù, an notennoù yezhouriezh, an notennoù gramadeg. Ha c'hoazh n'eus eno nemet un tu eus hon oberoù. An tu all eo ar savet ez int evit ur c'hevredig n'eus ket anezhañ c'hoazh. Bez' ez int ar greun a sankomp en douar gant ar mennoz e taolint frouezh diwezhatoc'h. Ha setu perak omp akedet da vec'hiañ enno ar muiañ hag ar gwellañ eus galloud ar yezh da bourchas danvez deroù d'ar spered. Aze emañ ar ster pennañ, evidon ar ster nemetañ, eus ar pezh a reomp : pourchas danvez deroù.

E kalon ar Yezhouriezh emañ argraf al leterc'hañ. N'eo ket a-walc'h diskleriañ ez eo al leterc'hañ pe, dre vras, an dareulañ, afer an arz ; afer ar skiant eo ivez. A dra sur, ostilh an arzour eo an dareulañ, eleze an distreiñ derc'henoù eus ar bed boutin d'ober dezho derc'hennañ ur "bed" nevez a grouont dre ar fed eeun m'en derc'hennont. Al leterc'hañ dreist-holl zo unan eus strujusañ araezioù ar c'hrouiñ bed dre lakaat an derc'henoù da linkañ

diwar ergorennoù kent etrezek ergorennoù digent. Hervez a lavarar boas, un arzour, un aozer lennegezh a grou ur “bed” nevez — komz a reer eus “bed” Roparz HEMON, eus “bed” PICASSO ; pe, hervez ma klever c’hoazh, “e tegas pep arzour un doare digent da gaout ar bed, da vezañ er bed” — bomm hemañ a ve dikoc’h a-hervez, kuistrek ne lavaran ket : evel pa vije roet dimp ar bed ur wech da vat, dimp da emober dioutañ, evel pa na vije ket ar bed estreget ar c’hornig alvez ma tifretomp. Hogen n’eo ket al lavar a zo er bed, ar bed eo a zo el lavar hag al lavar eo a ro deroù d’ar bed. An danvez deroù pourchaset gant Roparz HEMON ne baouez ket a zeraouiñ, a enaouiñ danvez deraouioù gant ar re o deus e zegemeret da vonveziad. Ma ne vije ket ar seurt nevezñ bed, spisoc’h : ar seurt nevezvedañ, ma ne dalvezje ket ar brezhoneg da seurt nevezvedañ, e vije ar yac’husañ d’an holl ez aje ar brezhoneg da get ur wech da vat, rak ne vije anezhañ nemet ur vac’h o herzel ouzh e yezherion a vont etrezek danvez deraouioù en ur yezh all.

An arzourion hepken ? Mab den, an den louet zo krouer ; evel ma lavare sant Aousten : “Krouet e voe mab den evit ma ve un deroù.” An dud a skiant n’int ket nemedenoù. Ar Jedoniezh, ar Fizik zo doareoù da nevezñ ar bed : ur jedoniour, lakaomp EULER, ur fizikour, lakaomp EINSTEIN, o deus degaset doareoù digent da intent o diskiblezh ha dre se da nevezvedañ ; en diarsell-se emañ hon mennad lakaat ar Jedoniezh, ar Fizik, h.a. e brezhoneg : sellout a reomp an diskiblezhioù-se n’eo ket evel adeiladoù kefredel sonnet, diflach, echu, met evel danvez deraouiù a gavo e brezhoneg amveziadoù dibarek, a denno eus ar brezhoneg bonveziadoù etrezek lammoù nevez. Alese e komprenner ar roll kreiz a zo d’al leterc’hañ e kerzh ar ouezoniezh : al linkañ eo eus an derc’henoù o ren en hon amzer etrezek ergorennoù da zont e vo eñ an engehenter anezho. E komprenner ivez roll ar yezh er skiantoù : ouzhpenn ma vez al leterc’hañ nerzh diorren ur yezh, pep yezh o vezañ ur gouraleg leterc’hadoù, ez eo pep yezh ur moull leterc’hadoù evit pep krouiñ denel, ha pa ve ar c’hrouiñ arzel pe ar c’hrouiñ skiantel.

En ur jedoniezh vrezhonek e-giz hini MAROT¹, ma kevoder eus un allyezh ar gerioù kreñv, verboù ha pennanvioù, da ren ar prezeg en hon hini, emañ lamet diouzh ar brezhoneg e varregezh da bourchas amveziadoù dibarek d’an devezout ha digant ar jedoniour ar chañs da amparañ bonveziadoù, eleze da ziraez un devezout jedoniel digent. Evit a sell an Hinouriezh, ne spir ket

¹ Sl. KIS-731 – Ar brezhoneg, ar Jedoniezh hag ar Skol veur, La-14, pp. 311-316.

degas da arguzenn e ra an holl yezhoù gant an hevelep termenoù, an hevelep leterc'hadoù. An un arguzenn a zeu gant MAROT evit kinnig *absiss* h.a. Ken emañ dirak an dazeilad-mañ : pe lezel an erbar da gouezhañ, rak n'eus ket brasoc'h abeg da sevel un hinouriezh vrezhonek c'hoar da jedoniezh MAROT eget ma ve da embann bremañ un destladur ar molekul (peg dre ret ouzh an termenoù etrevroadel) ; pe sevel un hinouriezh vrezhonek diouzh an diarsell a zo hini hon labour abaoe ar penn kentañ. Pa vo ur gevredigezh vrezhonek, e vo abred a-walc'h evit embann un treuzskrivadur brezhonek eus destladur ar molekul hag eus kement hanc'herieg peg dre ret ouzh an termenoù etrevroadel. Betek an amzer-se e tleomp lakaat hon nebeut nerzhoù ha loazioù da bourchas danvez deraouioù d'ar vrezhonegerion da zont ha d'an dornadig brezhonegerion a zo. Dit da welout ha hanc'herieg an Hinouriezh zo unan a rank chom peg dre ret ouzh an termenoù etrevroadel (evel ma soñj da MAROT ez eo hini ar Jedoniezh) pe unan ma c'hell an nevezvedin kavout ur bon (evel ma soñj da aozerion geriadurioù Preder, adalek GEGO, GEMED, GEJED betek GEVER, ez eo hini o diskiblezhioù).